

Kanaouenn ofisiel / Chanson officielle Betek an Trec'h

1/ Setu miz Mae 2018
 Ar Redadeg betek an trec'h
 Lañset en-dro an abadenn
 Ur pezh raktres da gas da benn
 War an aod ha war ar maez don
 Reiñ da yezhoù Breizh un dazont
 E-pad re bell int bet damvouget
 'Vint ket laosket da vont da get

Diskan :

**Deus 'ta frei kozh da hej da vro
 Gwisk da dicheurt ha tap da dro
 Mil eizh-kant gwech 'bep eil yelo
 Kozh ha yaouank da ziskano :
 War-sav 'vit kas war-raok hor yezh
 Taol da bouez-mouezh war ar pavez
 kasomp an test uhel ar vrec'h
 Betek an trec'h !**

2/ Gwriziennet pe nevez hadet
 Yezhoù Breizh ennomp diwanet
 Keit vezer entanet ganto
 An holl c'hell distagañ 'ne'o
 Tarzhoù mouezh er gwenojennoù
 Strak ar gerioù en holl straedoù
 Poent eo herzel karrig an Ankoù
 Tapomp e blas war an hentoù

Diskan

3/ Na pa vezer aet skuizh ganti
 Kollet ar youl, kollet ar spi
 Birvilh ar rederien ruzet
 Adlañs kalon ar Vretoned
 Riboulioù a-hed ar ribinoù
 Reuz, sonerezh, kanoù, c'hoarzhoù
 Tud kar ha mignoned o redek
 Plijadur vras ga'r Redadeg !

Diskan bis

1/ Voici le mois de mai 2018
 La Redadeg jusqu'à la victoire
 La course est relancée
 Un beau projet à mener
 Sur la côte comme dans les terres
 Donner un avenir aux langues de Bretagne
 Trop longtemps elles ont été étouffées
 Nous ne les laisserons pas s'en aller

Refrain :

**Viens donc vieux frère faire bouger ton pays
 Mets ton t-shirt c'est à ton tour
 Mille huit-cent fois se relayeront
 Vieux et jeunes et tous chanteront
 Debout pour faire avancer notre langue
 Ton accent court sur le pavé
 Portons haut le témoin
 Jusqu'à la victoire !**

2/ Enracinées ou ressemées
 Les langues de Bretagne en nous ont germé
 Tant qu'elles nous tiendront à cœur
 Tout le monde pourra les parler
 Des éclats de voix dans les chemins
 Des mots résonnent dans toutes les rues
 Il est temps d'arrêter la charrette de l'Ankou
 Prenons sa place sur les routes

Refrain

3/ Et lorsque l'on n'a plus d'énergie
 Perdu l'espoir, perdu l'envie
 La ferveur des coureurs en sueur
 Relance les Bretons de cœur
 Des fêtes au gré des chemins
 Du reuz, de la musique, des chants et des rires
 Familles et amis courent ensemble
 La Redadeg à pleine joie

Refrain bis